

Hac evit d'ho Chustiç pelloc'h satisfia
 Grit d'in dious hoc'h exempl en em vortifla;
 Grit ma quirin pelloc'h ar guir humilite,
 Ar souffranç, an douçder ac ar simplicité.
 Amen.

NOËL NEVEZ

Composet en enor d'an Nativite hor Salver Jesus-Christ ⁽⁷²⁾

(Voar un aër gallec).

Petra so henvoas a neve,
 Ma zeus cals a dut voar vale ?
 Perac e za a vandennou
 Ar bopl en nos d'an Ilisou ?

Perac monet abars an de
 D'an Ilis da bidi Doue ?
 Henvoas eo ganet ar Messi,
 Henvoas eo deomp e adori.

Perac an dut epad an nos,
 Eleac'h chom er guær da repos,
 A ya da ober Oræson,
 Da gofes, d'ar Gommunion ?

Me garre gouzout ar ræson
 A guement a zevotion :
 Evir reço Roue an Eê
 A ra er bed-mâ e antre.

(72) *Noueliou nevez...* E Quemper, E ty Blot, 1823, p. 1-11. — On trouvera dans les *Cantilheu spirituel...* de 1804 un vieux cantique en dialecte vannetais, dont le début ressemble à celui de notre *Noël nevez*. Il ne comporte que 14 quatrains. — Voyez *Leorik Kanaouennou Nedelek*, Moulierez Ar Bobl en Keraez, 1911, p. 13-16.

ET NOËLS POPULAIRES BRETONS

73

Perac e caner an Oñc
 En nos henvoas e pep Ilis
 Perac e can ar Veleyn
 D'an anter nos an Offeren ?

Perac e lavar ar Bælec
 Teir Offeren da Nedelec ?
 Evit enori guel-a-se
 Ar Myster an Nativite.

Teir differant Nativite
 En deus Jesus guir Map Doue.
 Ar guenta a ra dezàn e Dat,
 An eil Mari, Mam douç ha mat;

Hac an drede Nativite
 A glasc Jesus en hon ene
 Piou a refuso e ene
 Da Jesus leun a garante ?

Map Doue ganet a viscoas
 A so ganet en nos henvoas,
 Ganet gant e Dat a viscoas,
 Ha gant Mari en nos henvoas;

Un nos scleroc'h evit an de
 A ra deomp guelet Map Doue,
 Map Doue ganet a viscoas
 A so ganet en nos henvoas.

O nos a ra bet neve flam,
 Ha repari pec'het Adam !
 O nos hor c'harg demeus a joa,
 Oc'h effaci pec'het Eva !

O nos a ra deomp hor Salver
 Leun a garantez ha douçder
 Kanomp dezàn, pa ma é vouel,
 A galon vad Noël, Noël.

O nos a venediction !
 O nos a gonsolation !
 O nos a c'hrac, ô nos cûrus
 A ro deomp, ar Mabic Jesus !

O nos divin ! ô nos santel !
 Canomp Noël, canomp Noël !
 O nos certen leun a joa !
 Canomp, canomp : Alleluia.

Pelec'h emoc'h, Patriarchet;
 Pelec'h emoc'h-u, Prophetet ?
 Emoc'h pell so oc'h hirvoudi,
 Ret eo henvoas ho consoli :

Ganet eo henvoas ar Messi
 Gant ur ver'hes hanvet Mari.
 Gloar da zoue, Tadou santel,
 Ha canomp oil Noël, Noël.

Evel ma teu an Heaul da dremen,
 Hep e zerri, dre ur veren,
 Eo ganet, hep e oflanci,
 Jesus e poull calon Mari.

Mari, hep coll he furete
 A so guir Vam da vap Doue;
 Suppliom-p-hi guitibunan.
 D'hor presanti d'he Map bihan.

Incontinent ma voa ganet,
 E tostas ountâ an Ælet :
 Disquen a reont var an douar
 Da servicha o Impalar;

Haliguenta so etreze
 Da renta homaich d'o Roue.
 Rentomp d'hor Roue immortel
 Homaich en ur gana Noël.

ET NOËLS POPULAIRES BRETONS

75

Pa voa ganet ar Pastor mat,
 E tepechas un Æl limat
 Da vonet da avertissa
 Ar Bastoret d'er bisita.

Ny ho ped, Pastor binniguel,
 D'hor bisita ny ho tenvet;
 Jesus so ur Pastor fidel,
 Canomp dezàn Noël, Noël.

An Æl en Eon apparisset,
 A lavaras d'ar Bastoret :
 N'ho pezet aoun na spount ebet,
 Salver ar bed a so ganet;

Annonci a ran deoc'h henvoas
 Ur c'helou caër hac ur joa bras;
 Ar joa a so universel,
 Canomp Noël, Noël, Noël.

It, Pastoret, it da velet.
 Ar Pastor mat, Salver ar bet;
 It, Pastoret d'ober enor
 Da ur Mabic so ho Pastor;

Mui e istim ho qualite
 Evit hini ar Rouane :
 Canit Noël, canit Noël
 Da Jesus, Pastor éternel.

E Bethleem en ur c'hraouic
 C'hui gavo ganet ur Mabic,
 Lequet eno da reposi
 Gant e Vam ar Verc'hes Vari.

Nep a zoug ar bed var e vez
 So mailluret gant ur verc'hes;
 Ur verc'hes caër evel an de
 A zispos a Roue an Eê.

Clevet voa an Ælet neuse
 O cana voar an ton neve
 Ar Gloria in excelsis,
 Pehini a ganer en Ilis.

Cana a reont ur music
 Celestiel hac Angelic
 En enor ar Roue a c'hloar,
 Ganet henvoas voar an douar.

Ar Bastoret carguet a joa,
 Evel m'o c'hlefsont o cana,
 A larras d'an eil eguile :
 Deomp da velet Mabie Doue;

Da Vethleem querzomp buan
 Da adori ar Mabie bian
 Guelet a raimp eno ganet
 Caëra Mabie, so er bet.

Lavaret a ra ar bastoret
 E Bethléem pa in erruet :
 Bonjour bonjour, Salver ar bet;
 Chetu ni deut d'ho quelet.

O caout eur joa vras ountâ
 Ez eont oll da vouchat dezâ
 En eur gana Noël, Noël
 Da Vabic an Tad Eternel.

Allas ! emeindi, Mabie coant
 Ny n'hon eus nag aour nag arc'hant
 Ma pliche gueneoc'h, Mabie mat,
 Accepli hor bolonte vat,

Chetu aze hor goaligner
 A offromp deoc'h hor Pastor quer
 Ha da c'hortos ober gueli
 Ny a gano Noël, Noël.

ET NOËLS POPULAIRES BRETONS

77

Cals a boan o deus o quital
 Ur Mabic quen dous a quer mat;
 O c'halonou so ravisset
 O contempli en e c'henet;

Rag-se gant Joseph ha Mari
 E carrent chom d'e adori,
 Ha da gana Noël, Noël
 Da Vabic an Tad Eternel.

Quemeret a reont a c'honge
 En eur voucha dre garante :
 Adieu, Mabic carantezus
 Adieu, adieu, Mabic Jesus.

Ny esper c'hoas cana Noël
 Ebars er Palaes Eternel
 Ny a esper cana en Eê
 Noël epad an éternité ⁽⁷³⁾.

*
 * *

Pa ganas ar verc'hes Vari
 He mabic en ur Marchossi,
 Guelet e voa en Oriant
 Ur Stereden scler ha brillant.

Ur Stereden dreist ordinal
 Pehini a gonda ractal
 Da Vetheleem an tri Roue
 Da adori ar Roue neve.

Grac Doue so eur stereden
 A offr ato he sclerigen
 D'an oll pere a so dallet
 Dre devaligen ar pechet.

(73) La gwerz continue en développant le thème de l'Épiphanie.

Ar feiz so ive eur stereden
 Pehini a ro sclerigen
 D'hor c'hundui da velet Doue
 En Rouantelez eus an Eê.

O tremen dre Jerusalem,
 Da vont d'ar Guer a Vetheleem,
 An tri Roue en em estonas
 O velet e tisparissas

Ar stereden o c'hundue
 Da velet Roue ar Rouane.
 Malheur memes d'ar Rouane
 Pa vent privef a c'hraç Doue !

An tri Roue en ur vonet,
 A c'houl pelec'h ez eo ganet
 Ar Roue deus ar Juzevien,
 Rac guelet o deus e stereden

Hor c'honduet ho deus o tri
 Evit donet d'e adori ;
 Malheur, malheur doc'hni pecher,
 A vanc d'adori ho Salver !

Ar Rouane deut a bell bro,
 En ur dremen a c'houll ato :
 Ny gare gout pelec'h e ve
 Ar Roue ganet er Judee ?

Pep hini en em estonas^o
 Hac a eureu un tumult bras;
 Herodes spontet a c'houlle
 Petra sinifi quemense ?

ET NOËLS POPULAIRES BRETONS

79

Dignemer a eure Herodes
An tri Roue en e pales,
Goulen a ra, eno deze
Petra voa gandhe a neve.

Goull a ra dezo an amser
O devoa guelel ebars en aer
Ar stereden scler ha brillant
Apparisset en Oriant.

O veza neuse assemblet
En e bresang an Doctoret,
E teuas d'o interrog
Pelec'h voa ganet ar Messi.

Respont a rent ar doctoret,
E Bethleem ez eo ganet;
Enoret bras ez eo ho quer,
Bethleemis, gant hor Salver.

Ah ! Bethleemis, tud ingrat,
C'hui o pezo sur calonat,
Pa rencot mont dirac Jesus
D'an deis eus ar varn rigourus.

Refuset oc'heus ho tier
Da ziguemeret ho Salver.
Petra rafet-hu, pec'heupien quaes,
Pa zerro ouzoc'h e Balez ?

Herodes goude an audiang
Em gaf contant en apparang
Laret a ra d'ar Rouane :
It da Vethleem, Autroune.

GUINNANÉE

Goude beza guelet ar Messi,
 Deut dre amà, me ho supli,
 Contant bras ouñ e guirione
 Da adori ar Mabie-se.

O tyrant cruel Herodes !
 Guelet a vo da drañtours,
 Perac e glasq de valtreñ,
 Mar falle dit e adori ?

Perac cruel ec'h eus laquet
 D'ar maro an innoñtet ?
 Ar Mabie-ññ, den malehurus,
 A vo da Varner rigourus.

Pebra ouffes-le, Herodes,
 D'ober da vabic ar Ver'hes ?
 Gant ur sell e laca, pa gar,
 Da grena an En hac an douar.

An arme bras eus an Ælet
 A gren memes ous e velet;
 An hano hepquen aneza
 A ra d'an diaoulou crena.

Apparissa a ra a neve
 Ar stereden an tri Roue;
 O caç a ra da adori
 Da Vethleem mabic Mari.

Caout a reont ar Messi
 En ur craou equichen Mari.
 Gant ar joa o devoa ounta
 Et tostoont d'e briata.

ET NOËLS POPULAIRES BRETONS

81

Petra crenit-hu, Rouane,
 O velet paour ar guir Roue ?
 Penaus cridi eo puissant
 Ur Roue hep aour nac arc'hant !

Evit pales hac evit ty,
 N'en deus nemet eur Marchossi;
 Mar Deo en En Impalar,
 Perac eo paour var an douar ?

Ne d'oc'h quet tromplet, Rouane,
 Guelet a rit ar guir Roue,
 Petra bennac m'er guelet paour,
 Mestr eo d'an archant ha d'an aour.

Dispriset eo var an douar,
 Hac en En carguet eus e gloar,
 Carguet an douar hac an Eê
 Eus a gloar e Vajeste.

Ar Rouane carguet a fe,
 Anflammet dre guir carante,
 A yent humblamant voar daoulun,
 D'adori a Mabie divin.

Pep tra vent contant da ober
 Da renta enor d'or Salver,
 Disquez a reont o c'harante
 Dre eur guir liberalite.

Tri fresant caer a consequanç
 An Aour, ar Myr, hac en Esanç
 A offre dezàn an tri Roue,
 Testeni eus o c'harante.

O c'horf memes hac o buhe
A gonsacront de Vajeste;
Presanti a reont ho c'halon
Evel a c'haëra donæson.

Offri a reont de vajeste
An aour eguis da ur Roue,
An esañ a represante
Penaus et voa ar guir Doue.

Ar myr merq e voa den mortel
Ha penaus e lleye mervel,
Evit prena a neve flam
Ar bet guerzet dre faut Adam.

Mar oc'h eus desir da offri
Tri seurt presant caer d'ar Messi,
Roet an aour eus ho carante
Evit pligeou d'e Vajeste.

Offrit ebars en ho calon
An esañ eus an oræson,
Ha dre ur binigen fervant
Presantit ur myr excelant.

Un Æl a zeu d'avertissa
An tri Roue quent quimiada,
Na zistrosent dre ar Palaes
Eneus ar Roue Herodes,

Rac na c'houlenne ar Messi
Nemet evit e vassacri.
Retourn a rent ar Rouane
D'o c'harter dre un hent neve.

ET NOËLS POPULAIRES BRETONS

83

Hastomp, hastomp ta da vonet
Da adori Salver ar bed,
N'eus nemet Joseph ha Mari
Gant o Mab en e marchossi.

Deomp buan da gana Noel
Da Vabic an tad Eternel;
Canomp Noel da Vabic Mari,
Noel gant joa ha gant melodi.

Ar memes Jesus enoret
E Bethleem gant an Ælet
Ar memes Salver bisitet
Er c'hraouic gant ar Bastoret

Ha ar memes mabic Doue.
Adoret gant an tri Roue,
So er sacramant an auter,
Adoromp-èn e peb amser.

Evidomp oll dre garante
Ez eo disquennet eus an Eñ,
Drè vertu ar Speret Santel
En deus en em gret den mortel

Ebars e poul calon Mari,
Evit dont d'hor savetei;
Guir vap eo d'an Tad eternel
Ha da Vari guerc'hes santel.

Chetu aman ur millouer,
Sellit ountan, ma breudeur quer,
C'hui a velo ar baourante,
Cherisset gant Roue en Eñ.

C'hui velo an humilite
 Peguer caer eo dirac Doue,
 Nep a bralico ar c'hontrel
 A souffro an lan eternel.

Gheta ur maestr celestiel
 Deut da zisqui deomp hor c'hentel,
 Un doctor eo deus an eê.
 Deut da ziscleria ar virione.

Disqui a ra hent ar barados
 Da veza clasquet deiz ha nos,
 Canomp dezan, canomp Noel,
 M'hor c'hassô d'ar gloar eternel.

Pa oue gânet hor Zalver (74)

Pa oue gânet hor Zalver
 E kraouik Bethléem
 E oue klevet an Elez
 O kana evelhen :

Diskan

Meulomp, adoromp, kanomp,
 Houman eo an offis,
 Meulomp, adoromp, kanomp
 Gloria in excelsis.

Gloria in excelsis
 D'an nep a zo er Gloar,
 Ha d'an nep en deus feiz
 Ar peoc'h var an douar.

(74) Ce Noël nous a été adressé par M^{me} Modir de la Forest-Landerneau.